

KENVREURIEZ AR BREZONEG



Nº 27

Kenvreurezh ar Brezoneg
eskopti Kemper ha Leon

T A O L E N N

KATIER 27

On Tad Santel ar Pab hag al lidêrêz e brezoneg.....	62
Ar Yaou-Gamb-lid.....	63
Gwener ar Groaz.....	64
An NOZ FASK.....	68
Ar Zul Fask.....	76
Fil Sul Fask.....	76
Trede Sul Fask.....	77
Pevare Sul Fask.....	77
Pempved Sul Fask.....	78
C'hwehved Sul Fask.....	78
YAOU-BASK.....	79
Seizved Sul ar Pask.....	80
Derhent Gouel ar Pantekost.....	80
XIed Sul war ar bloaz.....	81
XIIed Sul war ar bloaz.....	81
XIIIed Sul war ar bloaz.....	82
Sant Yann Vadezour -an derhent.....	82
Sant Yann Vadezout -an deiz.....	83
Sant Pêr ha Sant Paol - an derhent.....	83
Sant Pêr ha Sant Paol - an deiz.....	84
Gouel Santez Anna - e Santez Anna Wened.....	84
Gouel Meur ar PANTEKOST.....	86
Gouel an Dreinded Santel.....	86

Troidigezioù aotreet da arnod, evid an
Eskopti a-berz an Aotrou F. Barbu,
eskob Kemper ha Leon.

Kemper d'an 10 a viz kerzu 1971

V. Fave, eskob-skoazeller

Goulennit: KCMZ DCUE EN OVERENN: LEVR T (30 lur)

KCMZ DCUE EN OVERENN: LEVR B 202

digand : Job Seite - skol-an-aod - 29249 GUISSENY

C.C.P. 1738 -66 RENNES

Koumanant d'ar Baierou: 15 lur

On Tad Santel ar Pab

hag al lidêrêz e brezoneg.

D'an 18 a viz Du 1972, ez on eet gand Eskibien Kemper ha Sant-Brieg da weled on Tad Santel ar Pab. Epad eun hanter eur ez om chomet da zivizoud gantañ.

Kaoz a zavas diwar-benn al lidêrêz e brezoneg. Ar Pab a gavas mad kement-se. Setu amañ ar pezh a lavaras - n'eo ket gêr evid gêr avad -

Kaer e oa evel-just kaoud an hevelezh yez - al latin - el lidêrêz, dre hevar c'horn ar bed, merk ha skoulm a unaniez. Met gouzoud a ran eo c'houekoh ar bedenn distaget gand peb-hini en e yez e-unan, e yez pemdez-ieg, ar yez a intent mad gouzoud a ran ez eo deuet, gand ar yezou pobleg, al lidêrêz da veza bevoñ, birvidikoh, frouezusoh ivez sur awalh evid an eneoù, evel ma vefe en Iliz eur Pantekost nevez. Sellit 'ta ouz ar pezh a lavar Oberou an Ebestel da geñver deiz ar Pantekost kenta. N'eo ket heb abeg e-neus kemeret ar skrivagner ar boan da zisklêria roll an oll boblou a oa eno dastumet.

Hag on eet goudeze da lenn endro ar pennad-se (Oberou 2/8-II)
" Penaoz eta o hlevommi, peb-hini e yez e gavel ? Parted, Meded, Elamiz, tud ar vro etre an diou ster, tud a vro Judea, broiou Kappados, ar Pont, Azia, bro Frijia, bro Bamfilia, bro Ejipt, kornad bro Libia, wardro Kiren, tud euz Kêr Rom, Yuzevien koulz hag ar re bet payaned, Kreted hag Arabed. O hlevad a reom o tisplega en or yezou oberou kaer Doue."

Deuet eo bremañ da wir ar homzou-se, dre ar béd a-bez. Klevet am-eus overenna ha pedi er yez TAMOUL en indez gand an Tad Carof euz Kerzent Landunvez hag an Tad Hourmant euz Kollereg. E yez KETCHOUA gand an Tad Yvon Troal war menezioù an "Andes", e-keid ha ma prezege e AYMARA yez all lod parr ezioniz, an Tad Le Guern euz ar Morbihan, e yez LINGALA ha LARI e Brazzaville gand Corentin Le Corre ha Robert Le Scao, e POLINEZIANEG, e Tahiti hag en Inizi gand an Aotrou 'n Eskob Maze euz Pleiben, barreg-tre war ar yez, e-keid ha ma prezege an Ao. 'n Eskob Tirilly euz ar Gelveneg e rann-yez inizi " Marquises" e yez TPAI gand an Tad Leon euz ar Vourh-Wenn e Bangkok... hag evel-se ema kont e peb leh. Pebez kemm en ilizoù abaoe, n'eo aotrete implijoud yez ar vro el lidêrêz ! Ya, eur gwir Pantekost !

Klevet am-eus ivez, a drugare Doue, overenna, pedi ha prezeg e BREZONEG e Breiz hag en tu all da harzou Breiz.

Dond a ra din da zoñj er pezh a skrive Tanguy Malmanche (en eur gemma eur gêr)

" Me a fell din harzal gand ar chas,
yudal gand ar bleiz
ha pedi e brezoneg e Breiz !"

Gwir eo n'eo ket toud ar yez el lidêrêz, estreged dre ar yez e komz an den da Zoue. Med an dra-se a zo eun afer all.

Visant Fave 1973

AR YAOU GAMB-LID

Hirio, e lidom ar goan ziweza a reas Jezuz war an douar.
Pedet om da azeza ouz taol Jezuz a-unan gand an Ebestel.
Ep' ar goan-se, eo e-neus Jezuz greet e bedenn-veur a veuleudi.
N'eus ket a gomunion heb meuleudi da Zoue.

En deiz-se ivez, e-neus lavaret, meur a wech d'e Ebestel: "Bezit
karantez an eil evid egile, evel m'am-eus-me bet karantez evidoh."
N'heller ket komunia er Hrist heb kaoud karantez evid ar vre-
deur.

En noz-se c'hoaz, e-neus Jezuz savet Sakramant an Aoter, Sakram-
ant e Gorv hag e Wad; da zerhent e varo e oa; aze ema e destamant.

Ne vez ket lidet Sakramant an Aoter heb ober memor euz kement
e-neus greet Jezuz evidom: e vuez, e varo, e zazorh da veo.

Taolom kuit diouzom kement a vefe o lakaad dizunvaniez etrezom
hag or breudeur.

Greom ar peoh an eil gand egile, evid reseo ervad an hini e-neus
or haret beteg penn.

Sant Paol a skrive d'ar Halated VI: "Ni a dle tenna or gloar
euz Kroaz or Zalver Jezuz Krist; ennañ ema or zilvidigez, or buez hag on dazorh;
drezañ ez om salvet ha delivret."

PEDENN AN DIGOR:

Aotrou Doue, c'hwi a zeu d'or boda, evid lida Koan Zantel ar Yaou Gamb-lid:
an deiz-se e-neus ho Mab Unganet roet d'e Iliz Sakramant Nevez an Engleo
Peurbaduz,
araog mond euz e benn e-unan d'ar maro.

Plijet ganeoh e teufe ar Pred-mañ, sakramant e garantez, da rei deom ar garantez
hag ar vuez.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,

Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR PROVOU

Aotrou Doue, roit deom ar hras da gemer perz er Zakramant-mañ euz an Aoter.

Beb gwech ma lidom ar zakrifiz-mañ gand ar zoñj ahanoh,
e vez o tond da vad labour braz on Dasprena.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

PREFAS Sakramant an Aoter I : LEOR OVERENN pajenn 47

GOUDE AR GOMUNION

Doue oll-halloudeg, renevezet eo bet ganeoh on eneou e Koan Zantel ho Mab;
roit deom ar hras da azeza eun devez ouz ho taol en ho Rouantelez.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

Goude an Overenn, ar beleg a gas ar Zakramant e prosesion d'al
leh ma vo miret, beteg an deiz warlerh.

Epad ar brosesion, e vez kanet ar Pange Lingua pe ur han bennag
all en enor d'ar Zakramant.

Amañ, goude beza chomet sioul eur pennad, e tistro ar beleg d'ar
zakreteri.

Mad eo kendelher da bedi asamblez epad eul lodenn euz an noz.

GWENER AR GROAZ

Kan an digor ebéd hirio. Ar beleg, gwisket e ruz, a ya da stoui eur pennad dirag an aoter.

Chom a reer sioul, en eur zoñjal er pehejou an-unan hag e pehejou ar béd hag en eur houlenm pardon anezo digand Doue.

Ar beleg a bign ouz an aoter hag a lavar unan euz an diou bedenn amañ warlerh.

PEDENN AN DIGOR

Aotrou, ni a car ho peus evidom eur garantez heb muzul,
c'hwit ha n'ho peus ket dinahet rei ho Mab hoh-unan,
met ho peus roet anezañ evid savetei an oll dud.
Hirio c'hoaz, diskouezit deom ho karantez;
ni a fell deom mond da heul an Aotrou Krist,
en hag a gerz euz e benm e-unan warzu e varo;
deuit d'on harpa evel m'ho peus hen harpet,
ha santelait ahanom e Mister e Bask.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

PEDENN AN DIGOR

Aotrou, on Doue, dre Basion ho Krist,
ho peus distrujet ar maro, deuet deom da lod diwar ar pehed kenta,
ar maro hag a zalhe mab-den dindan e lezenn.
Grit deom beza heñvel ouz ho Mab:
diwar an natur m'eo on hini,
eo bet red deom anaoud stad an den kenta deuet euz an douar;
santelait ahanom dre ho kras,
evid deom anaoud diwar vremañ, stad an den renevezet, hag a zo euz an neñv.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

AR BEDENN EVID EZOMMOU AN OLL

An Aotrou Krist a zo deuet da veva war an douar, da vervel
ha da adsevel da vev evid an oll dud.
Evid an oll dud eo emacm o vond da bedi bremañ, dre or Zalver Jezuz Krist.

EVID AN ILIZ SANTEL

Pedom, va breudeur, evid an Iliz Santel, an Aotrou Doue.
Ra blijo gand Doue, an Tad oll-halloudeg, rei dezi ar peoh hag heh unani bepred,
he gwarezi dre ar béd a-béz, hag ober deom beva didrouz hag e peoh,
deom-ni neuze trugarekaad on Doue. (sioul ur pennad....)

Aotrou Doue peurbadel hag oll-halloudeg,
ho peus en Aotrou Krist, diskleriet ho kloar d'an oll boblou.
Beillit war hoh Iliz skignet dre ar bed a-béz ha gwarezit anezi,
ma chomo atao stard er feiz evid enbann hoh ano.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

EVID ON TAD SANTEL AR PAB

Pedom ivez evid on Tad Santel ar Pab, PI G'WHEHVED, e-neus Doue hag or Zalver
dibabet a douez an eskibien;
ra vo miret beo ha yah d' e Iliz, evid gouarn Pobl Doue.

Aotrou Doue Peurbadel hag oll-halloudeg, a renk peb tra gand furnez,
plijet ganeoh selaou or pedenn.
Beillit gand karantez war ar Pab ho peus dibabet,
evid ma talho startoh starta d'e feiz, pobl ar gristenien gouarnet ganeoh.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

EVID AN ESKIBIEN, AR VELEIEN HAG AR BOBL FIDEL

Pedom ivez evid on Aotrou 'n Eskob, an oll eskibien, ar veleien, an avielerien, evid ar re o-deus kargou en Iliz, hag evid ar bobl kristen a-béz.

Aotrou Doue peurbadel hag oll-halloudeg,
ho Spered a zantella hag a houarn korv an Iliz a-béz;
selaouit ar pedennou a gasom beteg ennoh evid an oll gristenien,
peb-hini hervez ar hras e-neus resevet;
grit ma teuio an oll d'ho servicha fidel gand sikour ho kras.

EVID AR HATEKIZIDI

Pedom evid ar hatekizidi, a zo war hent ar vadiziant.
Ra blijo gand Doue, on Aotrou, digeri o spered hag o halon
ha rei dor zigor dezo en e drugarez.
Goude m'o devo resevet ar pardon euz o fehejou, dre zour ar vadiziant,
grit dezo dond da veza izili euz Korv or Zalver Jezuz Krist.

Aotrou Doue peurbadel hag oll-halloudeg,
c'hwi hag a ra d'an Iliz dougen frouez,
lakit da greski e kalon or hatekizidi ar skiant hag ar feiz,
ma teuio da gaoud eur vuez nevez e dour ar Vadiziant
ha da gemered plas e-touez ho pugale.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

EVID MA VO UNANET AN OLL GRISTENIEN

Pedom c'hoaz evid an oll vreudeur o-deus feiz e Jezuz Krist,
hag a glask rên o buez hervez ar wirionez.
Plijet gand Doue o unani en eun Iliz hebken ha mired o unaniez.

Aotrou Doue peurbadel hag oll-halloudeg,
c'hwi hag a zastum en eur bobl hebken ho pugale strewet dre ar béd,
hag a vir an unaniez etrezo,
lezit ho taoulagad da goueza war dropell ho Mab.
Evel m'int bet badezet en heveleb badiziant,
grit ma chomint start en o feiz hag unanet er garantez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

EVID AR YUZEVIEN

Pedom evid ar Yuzevien, ar re genta a zo bet komzet dezo gant an
Aotrou, on Doue; grit ma 'z aint bepred war araog er garantez evid e ano
ha ma vezint muioc'h mui fidel d'an emgleo.

Doue peurbadel hag oll-halloudeg, c'hwi hag ho-peus dibabet Abraham
hag e lignez, evid ober anezo bugale ho promesa,
selaouit gand madelez pedennou hoh Iliz,
grit ma hello kenta pobl an Emgleo tizoud da vad ar zilvidigez,
ni ho ped dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

EVID AR RE N'O-DEUS KET FEIZ E JEZUZ KRIST

Pedom evid ar re n'o-deus ket feiz e Jezuz Krist,
ma teuio ar Spered Santel da rei dezo sklerijenn ha ma hellint evel-se
kemer penn-hent ar zilvidigez.

Aotrou Doue, peurbadel hag oll-halloudeg,
roit d' r re ne gredont ket e Jezuz Krist, ar hras
en eur gerzed gand lealded dirazoh, da anaoud ar wirionez.
Roet deom ar hras d'en em gared gwelloh an eil egile,
ha da anaoud gwelloh mister ho puhez,
evid beza evelse, dre ar béd, gwelloh testou euz ho karantez.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

EVID AR RE NE GREDONT KET E DOUE

Pedom c'hoaz evid ar re ne gredont ket e Doue;
evid ma teufent da gaoud anaoudegez anezañ en eur veva gand lealded
hervez o houstiañs.

Aotrou Doue peurbadel hag oll-halloudeg,
c'hwi hag ho peus laket e kalon mab-den
c'hoant d'ho klask ha galloud d'ho kavout,
grit, ni ho ped, ma hello an oll,
e-kreiz trubuillou ar béd, anaoud merkou ho madelez
ha kavoud war o hent testou euz ho karantez,
ha m'o devo evel-se, al levezet d'hoh anaoud,
c'hwi an Doue n'eus nemedoh, Tad an oll dud.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

EVID AR RE A ZO O HOUARN AR VROIOU

Pedom ivez evid ar re a zo o houarn ar vroioù.
Plijet gand Doue rén o spered hag o halon hervez e volontez,
evid ma hello an oll beva er pech hag er frankiz.

Aotrou Doue peurbadel hag oll-halloudeg,
a zo etre ho taouarn kalonou an dud ha gwirioù ar poblou,
taolit eur zell a vadelez war ar re a zo ouz or gouarn,
ma 'z ay atao war gresk, dre an douar a-béz,
gand sikour ho kras, ar pech, an urz vad, an ézant-buez
evid ar poblou hag ar frankiz, evid ar hredennou.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

EVID AN DUD GWASKET E DOARE PE ZOARE

Va breudeur ker, pedom Doue, an Tad oll-halloudeg,
evid ma tieubo ar béd euz peb gaou,
ma kaso pell diouzon ar hleñvejou hag ar gernez,
ma tigor dor ar prizonioù ha ma torro peb liamm,
ma veillo war ar vezourien, ma tigaso d'ar gêr an dud harluet,
ma roio ar pare d'ar re glañv hag ar zilvidigez d'ar re a zo war o zremenvan.

Aotrou Doue, peurbadel hag oll-halloudeg,
frealzidigez an dud doaniet ha nerz ar re boaniet,
selacuit ar pedennou a gas betog ennoh an dud gwasket e doare pe zoare,
m'o dezo oll ar joa da gaoud,
e-kreiz o foanioù, ar zikour euz ho madelez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

+++++

LID AR GROAZ

Ar beleg a zizolo hag a ziskouez deom ar groaz, benveg a boan hag a varo,
e-neus greet an Aotrou Krist anezañ, beveg a zilvidigez, sin euz ar vuez hag
an esperañs.

SETU AR HOAD EUZ AR GROAZ

E-NEUS DOUGET SILVIDIGEZ AR BED !

Epad ma vez an dud o pokad d'ar Groaz, e vez kanet.

LID AR GOMUNION

Ar beleg a zigas war an aoter an ostiou bet kensakret d'an derhent.

AR BATER

Kenteliet gand gourhemenn or Zalver ha desket ma 'z om bet gantañ da bedi e
kredom lavared:

On Tad hag a zo en neñv, hoh an bezet santelleet, ho rouantelez deuet deom,
ho polontez bezet grêt war an douar evel en neñv.
Roit deom, hirio, or bara pemdezic, . Pardonit deom hor pehejou, evel ma pardon-
om d'ar re o deus market ouzom, ha n'on lezit ket da goueza en tentadur, med on
diwallit diouz an droug.

On dizammit, Aotrou Doue, diouz peb droug, ha plijet ganeoh rei deom ar peoh en
on amzer, ma vezim bepred, dre ho madelez, distag diouz ar pehed, ha diwallet
diouz an oll drubuillou, da hortoz an eürusted a esperom ha distro or Zalver
Jezuz Krist.

- Deoh ar Rouantelez, Aotrou Doue, deoh peb galloud ha peb gloar da
virviken !

ARAOC AR GOMUNION

Aotrou Jezuz Krist, pa 'z an da gemer ho Korv hag ho Kwad, mirit na drofe ar
gomunion-mañ d'am barn ha d'am hondaoni, med, ablamour da garantez ho kalon,
grit ma talvezo d'am diwall ha d'am farea Korv hag ene.

Setu Oan Doue, an hini a zilamm pehed ar béd !

Va Doue, n'on ket din e teufeh beteg ennon, med lavarit eur gér hebken hag e
vra pareet.

Pa vo echu da gomunia, e lavar:

GOUDE AR GOMUNION

Pedom Doue !

Doue oll-halloudeg ha leun a vadelez,
c'hvi hag ho peus reñvezet ahanom dre Varo or Zalver hag e Adsao da veo,
dalhit beo ennom labour ho karantez,
grit deom, dre ar perz on-eus kemeret er mister-mañ,
ouestla or vbuez d'ho servicha.
Dre Jezuz Krist, or Zalver

AMEN !

Goudeze, e zacuarn astennet a-zioh an dud, e lavar ar beleg:
Lakait, Aotrou Doue, ho pennoz da ziskenn puill war ho tud fidel, o-deus, leun
a esperañs da zével ivez euz ar maro, lidet ho Mab. Roit dezo pardon ha konfort,
kreskit ho feiz ha roit dezo ar zilvidigez peurbaduz. Dre J.K. or Zalver. AMEN !

AR ZADORN ZANTEL An dud fidel, dirag bez or Zalver, a-zeu da envori
e Basion. Ne vez ket lavaret overenn ebéd, ken a vez kanet, e doug an Noz Fask
laouenedigez ar Fask. Ar viatik a hell beza kaset d'ar re glañv.

AN NOZ FASK

Peder lodenn a zo en Noz Fask:

1. Lid ar Sklerijenn. Ar gristenien en em vod endro da houlaouenn ar Pask, skeudenn euz ar Hrist, sklerijenn ar bed.
2. Lid ar Gomp. Envor a vez greet euz an traou burzuduz greet gand Doue, evid savetei e bobl.
3. Lid ar Vadiziant (pa vez tro). Goude ma vez benniget an dour, ma ar mare da vadezi. N'eus forz penaoz, an ilizad tud badezet a zo pedet da renevezi feiz o badiziant. O veza m'eo ar vadiziant ar zakramant or laka da dremen euz ar maro d'ar vuez, e-neus bepred eur plas braz e lidou an Noz-Fask.
4. Lid Sakramant an Aoter. Pobl Doue savet diwar ar vadiziant, a ginnig ar memor euz or Zalver, o kanañ dezañ meuleudi ha bennoz, hag oh en em vaga gand Korv gloriuz an Aotrou Krist dazorhet.

Ar beleg a zigemer an dud.

Breudeur muia-karet, en noz santel-mañ, m'eo or Zalver Jezuz Krist tremeneb euz ar maro d'ar vuez, an iliz a bed he bugale strevet dre ar béd a-béz, d'en em voda evid beilla ha pedi.

Evel-se, goude beza lidet asamblez ar zôñj euz Pask or Zalver, en eur zelaou e gomz hag o kemer perz en Overenn, e hellim esper kaoud perz ivez en treh e-neus bet war ar maro ha beva gantañ da viken e Doue.

I. LID AR SKLERIJENN

Tan a vo enaouet. An tan a zo sin a vuez hag a joa. Tarza a ra hag en em skigna ha cheñch doare an traou. Endro d'an tan eo eh en em voder, evid diskuiza ha marvaillad.

Ar beleg a vemig an tan

Aotrou Doue, dre he Mab, hag a zo Sklerijenn ar bed, ho peus roet d'an dud sked ho sklerijenn. Plijet ganeoh benniga ar flamm a lugern en noz; roit deom ar hras, epad goueliqu Pask da veza entanet gand ar hoant da vond d'ar Baradoz, ma hellim errucud eun devez e goueliou ar sklerijenn peurbaduz. Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

Goulaouenn ar Pask a vo neuze enaouet ouz an tan nevez.

Ar piled o tevi evid rei sklerijenn a zo sin en on touez euz an Aotrou Krist, dazorhet en e hloar.

Ar brosesion

Dirag an iliz, an oll a enaou o goulou ouz flamm piled ar Pask, hag a gers e prosesion en iliz, en eur zaludi dre deir gwech sklerijenn an Aotrou Krist. Evel-se e ra hent Pobl Doue, e sklerijenn a dle skedi dirag an dud evid ma reno to ar re-mañ gloar d'an Tad hag a zo en neñv.

SKLERIJENN AN AOTROU KRIST !

BENNOZ A LAVARON DA ZOUE !

Kan a veuleudi Pask

Ar beleg, digouezet dirag an aoter a ya d'e gador. Pa vez lakaet ar houlaouenn war ar hantolor, an avieler, pe ar beleg e-unan, pa ne vez avieler ebed,

a-zeu da ezansi al levr hag ar houlaouenn,hag e kan kanaouenn a veuleudi Pask.

Tridit gand ar joa,elez ar baradoz,
Tridit gand ar joa,servicherien Doue,
kanit,gand sonerez,an treh war ar maro,
deuet,hirio,da vad,dre halloud or Roue.

Bez evuruz,te ivez,o douar or mager,
a strink dicuzit hirio,kement a sklerijenn,
o veza ma'z out bet ruillet en e sklerder,
dre m'eo gantañ skubet kement teñvalijenn.

Ha bez laouen ivez,Fliz,or Mamm Zantel,
fichet en da gaera,gand splander da roue,
selaou,o tregerni,dindan pleg e vanniel,
e-barz an iliz-mañ,or han a levenez !

E gwirionez,just ha santel eo sevel ar vouez da gana,
a-greiz kalon an Tad oll-halloudeg,Doue kuzet,
hag e Vab Unganet,Jezuz Krist,or Zalver.
Eñ eo e-neus restaolet evidom d'an Tad peurbadel,
priz an dle sammet gand Adam.

Rag setu o para gouel ar Pask,
bet lakeet ennañ d'ar maro an Oan gwirion
a zeu da zakri dorojou an dud a feiz.

Setu an noz m'ho peus tennet euz Bro Ejipt bugale Israel,on tadou,
hag ho peus laket da dreuzi war ar zeh ar Mor-Ruz.

Setu an Noz ma kase tan eur zavadenm skeduz ,war a-dreñv,tenvalijenn ar pehed.

Deuet eo an noz a zeu da ziframma euz ar bed brein,dallet gand an droug,
ar re o-deus,hirio,ha dre ar béd a-béz,laket o feiz en Aotrou Krist;
noz hag a ra anezo tud salvet,hag a ro digor dezo e komunion ar zent.

Setu an NOz,ma teuas ar Hrist,torret gantañ liammou ar maro,
da adsevel leun a hloar euz an iverniou.

O gras vurzuduz a drugarez !

Dibab greet gand da garantez ha n'heller den beza e gortoz anezañ.
Evid prena ar sklavour e roit ho mab.

Eun dra red e oe pehed Adam,lamet goude goude-ze gand maro an Aotrou Krist.
Eüruz ar pehed e-neus talvezet deom eur seurt dasprener !
Rag ar galloud da zantellaad euz an noz-mañ,
a skub an torfejou,a walh ar pehejou,a laka glan ar beherien
hag a ro levenez d'an dud doaniet.

O Noz a levenez bar,ma teu an neñv d'en em unani gand an douar
ha ma teu an den d'en em gaoud gand Doue.

E kreiz dudi an Noz-mañ,plijet ganeoh,Tad Santel,digemer da zakrifis ar
pardaez,ar flamm a zav euz ar piled koar-mañ,a ginnig an Iliz deoh dre on
daouarn.

Grit ma tevo ,heb pacuez,hed a hed an Noz-mañ,ar piled Pask,
gouestlet d'hoh ano.

Grit ma plijo deoh ha ma skedo evel ar stered !

Grit ma vo c'hoaz war elum,pa zavo steredenn ar mintin
ha n'eus diskar ebed eviti:an Aotrou Krist,
dazorhet,deuet euz ar bez,euz an iverniou,
o strewi war an dud e sklerijennhag e beoh,
eñ hag a ren boe ganeoh ha gand ar Spered Glan,bremañ ha da virviken.AMEN !

II. LID AR GOMZ

Oh envori misteriou brasa ar feiz eo e teu ar gristenien da veva dre ar zakramanchou Maro or Zalver hag e Adsao da veco.

Er veilladeg veur-mañ, "mamm an oll veilladegou santel" (Sant Aogustin), e vez greet nao lennadenn, seiz tennet euz an Testamant koz ha diou euz an Testamant nevez. Ma vez eun digarez vad d'henn ober e heller lezel a gostez unan pe unan anezo. Med greet e vo atao teir lennadenn euz an Testamant koz pe, ouz red, diou nemetken araog an abostol hag aviel. Al lennadenn N° 3 (Ex. II4) ne vo ket lezet a-gostez evid digarez ebed.

Araog al lennadennou, ar beleg a zispleg d'an dud talvoudegez lid ar Gomz epad beilladeg ar Pask. Henn ober a ra vealhenn:

Breudeur, ema digor ar veilladeg santel. Selaouom bremañ dizoursi, Komz Doue. Gwelom penaoz, en amzer dremenet, Doue e-neus saveteet e Bobl, ha penaoz, en on amzer deom-ni ivez, e-neus digaset e Vab evid or zavetei.

Goulennom digand, Doue gelloud kas da benn al labour a zilvidigez boulhet dre Vister ar Pask.

Ar bedenn goude al lennadenn genta

Pedom...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel, c'hwi hag a ra kement a rit gand eur furnez hebpar, grit d'an dud ho peus dasprenet intent eo Sakrifis ar Hrist, or Pask eul labour kaeroh eged ar Grouidigez e penn kenta ar bed. Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

pe

Aotrou, on Doue, c'hwi hag ho peus greet ken kaer labour o kroui an den, ha burzudusoh tra ouz hen dasprena, grit deom herzel ouz touellêrêz ar pehed, dre furnez ar Spered, ha tizoud evel-se al levezêz peurbaduz. Dre JEzuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

Ar bedenn goude an eil lennadenn

Pedom...

Doue teir gwech santel, Tad an dud a feiz, o skuill warno ar hras da veza bugale deoh, ho peus lakeet da greski war an douar bugale ho promesa; dre vister ar Pask e rit euz ho servicher Abraham, evel m'ho poa prometet, tad an oll bobladou; grit d'ho Pobl gouzoud respont d'ar halv-se. Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

Ar bedenn goude an trede lennadenn

Pedom...

Aotrou, on Doue, dre sklerijenn hoh Aviel, ho peus dizolcet talvoudêgez ar burzudou greet e amzer an Testamant Koz; ar Mor Ruz eo skeudenn feunteun ar Vadiziant, hag ar bobl Yuzeo, dilivret euz sklavaj an Ejipt, eo skeudenn ar bobl kristen; grit ma teuio an oll dud, dre o feiz, da gaoud perz el lod roet da Israel, ha da veza renevezet, o reseo ho Spered. Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

pe

Bremañ c'hoazh, Aotrou, e welom o skedi burzudou, greet ganech gwechall:

gwechall ho peus diskouezet ho kalloud,
o frankiza eur bobl hebken euz an Ejipsianed o redag war o lerh;
ha bremañ eo an oll boblou a roit dezo ar zilvidigez,
en eur rei dezo eur vuez nevez, dre zour ar vadiziant;
grit ma teuio oll dud ar béd a-béz da veza bugale da Abraham,
din da veza bugale dech. Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

Ar bedenn goude ar bederved lennadenn

UNAN euz ar re a zeu warlerh al lennadennou 5,6 pe 7, pe c'hoaz:
Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
evid enor hoh ano, lakit da greski al lignez prometet d'on tadou,
en abeg d'o feiz, da greski ivez niver an dud greet anezo ganeoh ho pugale;
ra velo an Iliz, bremañ dija, o tond da wir
ar bromesa n'o deus bet morse ar batriarked douetañs warni.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

Ar bedenn goude ar pemped lennadenn

Unan euz ar re a zeu warlerh al lennadennou 4,5 ha 7 pe c'hoaz:
Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
ha n'eus esper ebed nemedoh evid ar béd,
c'hwi hag a roe da anaoud dre vouez ar Brofeted ar misteriou
a zeu da wir hirio plijet ganeoh, c'hwi hoh unan,
sila e kalon ho Pobl ar pezh a c'hoanta,
peogwir ne hell hini euz ho tud fidel
mond war araog war hent ar zantelez, heb na vefe poulzet gand ho kras.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

Ar bedenn goude ar c'hwehved lennadenn

Unan euz ar re a zo warlerh al lennadennou 4,5 ha 7 pe c'hoaz:
Aotrou Doue, c'hwi ha na ehanit da lakaad hoh Iliz da greski,
o helver daveti ar re a zo pell diouzh,
plijet ganeoh miret dindan ho kwarez
ar re ho peus neteet e zour ar vadiziant.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

Ar bedenn goude ar seizved lennadenn

unan euz ar re a zo warlerh al lennadennou 4,5 pe 6 pe c'hoaz:
Aotrou, on Doue, galloud digennmuz ha sklerijenn heb diskar,
sellit gand madelez ouz Sakramant burzu duz an Iliz en he fêz;
evel m'eo bet en ho sonj a béd eternite,
kendalhit e peoh oberenn silvidigez an dud;
grit ma teuio ar béd a-béz da gredi er burzud:
ar pezh a oa diskaret a zo bet adsavet,
ar pezh a oa eet koz, a zo bet renevezet,
ha peb tra a gav endro e gaerder kenta
en Hini a zo ar vammenn euz peb tra:
Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
eñ hag a reñ ganeoh ha gand ar Spered Glan, bremañ ha da viken. AMEN !

pe

Aotrou, on Doue, c'hwi hag a fell deoh,
or prepari da lida Mister ar Fask,
en eur ober deom selaou an Testamant Koz hag an Testamant Nevez;
grit d'or halonou intant an drugarez ma'z oh,
evelse en eur anaoud ar grasou dija resevet,
e startaio ennom an esperañs da gaoud ar madeu da zond.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

GLOAR DA ZOUE...

Goude ar bedenn ziweza ar beleg a stag gand ar "Gloar da Zoue", kanet gand an oll en o zav.

AR BEDENN

Aotrou Doue, c'hwi hag a laka da skedi en noz-mañ ken santel,
gand gloar Mister or Zalver Adsavet da veo,
lakit da greski en hoh Iliz ar spered a vugale Doue, ho peus roet dezi,
evelse, renevezet en or horv hag en on ene,
e vezim troet d'ho servicha,
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

AL LIZER ABOSTOL

Amañ e vez lennet al lizer abostol ha goudeze kanet an ALLELUIA hag an AVIEL

III. LID AN DOUR-BADIZIANT

Ma'z euz tud deuet (tud vraz) o vond da reseo ar Vadiziant, ar beleg o digemer hag a gomz evel-henn d'an dud fidel:

Kristenien, va breudeur, pedom oll asamblez evid or breudeur a zo o vond da veza badezet ha room harp d'o esperañs. En eur veza badezet, e teuint da vev eur vuez nevez; goulennom eta digand Doue, on Tad, skuill warno e vennoz.

Ma n'eus badiziant ebéd da ober, ez a ar beleg betek kibell an dour-badiziant, a dle beza a-wel d'an oll hag e lavar:

Kristenien, va breudeur karet, pedom Doue, on Aotrou,
da zantellaad an dour-mañ,
evid lakaad ar re oll a resevo Sakramant ar Vadiziant,
en Amzer zantel ar Pask, da vev euz eur vuez nevez en Aotrou Krist.
(ha goulennom digantañ rei brukuz e garantez d'ar hatekizidi,
a vo badezet en noz-mañ, dre ar bed.

AL LITANIYOU

Ma n'eus badiziant ebéd, e heller chom heb lavared al litanieu.

Galloud a reer ivez astenn al litanieu gand anioù Sent all.

Aotrou Doue, ho pet truez.
Aotrou Krist, ho pet truez.
Aotrou Doue, ho pet truez.

Santez Mari, Mamm da Zoue
Sant Mikêl

pedit evidom !
pedit evidom !

Elez santel Doue
Sant Yann Vadezour

Sant Jozef
Sant Pêr ha Sant Paol,
Sant Andrev
Sant Yann

Santez Mari-Madalen

Sant Stefan

Sant Ignas Antioch

Sant Lorañs

Santez Perpetu ha Santez Felisite

Santez Agnès

Sant Gregor

Sant Ogustin

Sant Benead
Sant Fransez ha Sant Dominik
Sant Fransez Xavier
Sant Yann-Vari Vianney

(I)

Santez Katell a Zien
Santez Tereza Avila
C'hwi oll, Sent ha Sentezed Doue

Rezit 'vidom madelezuz On dilivrit, o va Doue !
Euz kement 'zo fall
Euz kement 'zo pehed
Euz ar maro da viken
Dre hoh Inkarnasion
Dre ho Maro hag hoh Adsao da veo
Dre zonezon ar Spered Santel,

Ni hag a zo peherien En an'Doue or zelaquit !

Ma vez unan bennag da vadezi:

Evid ma plijo ganeoh lakaad da veva euz ho puez
ar re a halvit d'ar Vadiziant...

Jezuz, Mab an Doue beo
Aotrou Krist, or zelaquit,
Aotrou Krist, roit deom or goulenn.

(I)

Amañ e heller lakaad, cuspenn, anoiou ar Zent enoret e Breiz, evel:

Santez Anna
Sant Erwan
Sant Gwenole
Sant Kaourintin
Sant Paol Aorelian

EVID BENNIGA AN DOUR

En ilizou ma vez greet badiziantou enno:

Aotrou Doue, gand ho kalloud kuzet,
e rit burzudou braz dre ho sakramanchou;
a-hed istor ar zilvidigez, ho peus implijet an dour,
evid rei deom da anacud gras ar Vadiziant.

Kerkent ha penn-kenta ar bed,
ho Spered a blav war an douriou,
evid sila enno an nerz da zantellad.
Dre an dour-beuz, e reeh ano dija euz ar Vadiziant a ro eur vuez nevez,
peogwir e oa dija an dour ar skeudenn
hag euz ar pehed distrujet hag euz ar justis o tond er bed.
Bugale Abraham ho-peus greet dezo treuzi ar Mor Ruz war ar zeh,
evid ma teufe ar ouenn delivret euz ar sklavaj,
eur skeudenn euz Pobl an dud badezet.

Ho Mab muia-karet, badezet gand Yann e dour ar stêr Jordan,
a resevas oleadur ar Spered Santel.
P'edo stag ouz ar groaz, e lezas Jezuz gwad ha dour
da redez euz e gostez; ha pa oe adsavet da veo,
e lavaras d'e ziskibien: "It, prezegit d'an oll boblou
ha badezit anezo en ano an Tad hag ar Mab, ar Spered Santel."

Bremañ, Aotrou, taolit eur zell a garantez war hoh Iliz,
ha lakit da darza enni mammenn ar Vadiziant.
Ra zeuio ar Spered Santel da rei d'an dour-ze gras an Aotrou Krist,
evid ma vo an den krouet da denna deoh, gwalhet dre ar Vadiziant,
euz kement stlabez a zeufe da faosi ar skeudenn ahanoh;
ha ma teufe endro da veo euz an Dour hag euz ar Spered,

evid eur vuez nevez a vogel da Zoue.

Aotrou Doue, ni ho ped: ra zeuio galloud ar Spered Santel
war an Dour-mañ, dre bras ho Mab,
evid ma teuio da adsevel da veo gand an Aotrou Krist,
kement den a vo bet badezet, sebeliet er maro a-unan gantañ.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

Amañ, eur han:

Feunteuniou an Aotrou, meulit an Aotrou !
Dezañ meuleudi, meuleudi da viken !

Pe eun dra bennag all.

(Amañ ar badiziantou ma'z eus tro)

En ilizou na vez ket greet badiziantou enno:

Va breudeur, goulennom digand an Aotrou Doue benniga an Dour-mañ;
strinket e vo dour warnom gand ar zonj euz or Badiziant:
ra blijo gand Doue or mired fidel d'ar Spered on-eus resevet.

(chom sioul eur pennad... ar beleg adarre e
zaouarn jointet)

Aotrou Doue oll-halloudeg, selaouit pedennou ho Pobl
a zo o veilla en Nozvez Santel-mañ;
p'emaom o lida burzud or Hrouidigez
ha burzud brasoh on Dasprenadur,
plijet ganeoh benniga an Dour-mañ.

Krouet ho-peus an dour evid trempa an douar
hag evid rei d'or horvou freskadurez ha glanded.

Greet ho-peus anezañ benveg ho trugarez:
rei frankiz d'ho Pobl ha terri e zehed er goueleh;
drezañ o-deus ar Brofeted roet kelou euz an Engleo
ho-poa c'hoant siella gand an dud;
dre an dour-ze, erfin, santelleet p'oa bet badezet Jezuz er stér-Jordan,
ho-peus renevezet on natur troet gand ar pehed
e badiziant ar hanedigez nevez.

Ra zeuio, bremañ, an dour-ze da zigas deom sonj deom euz or badiziant
ha da rei perz deom e levenez or breudeur badezet gand Goueliou Pask.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

EVID RENEVEZI AR FEIZ DISKLERIET DA ZEIZ AR VADIZIANT

An dud vraz nevez badezet, o zadou-paeron hag o mammou-maeronez o-deus
diskleriet o feiz.

Ar re all, ar houlaouenn war elum ganto en o daouarn, a zo o vond da
renevezi o fromesa.

Ar beleg a lavar dezo:

Va breudeur, dre vister ar Pask,
ni ivez a zo bet laket er bez gand an Aotrou Krist,
da genver or Badiziant, evid deom dond da veva euz eur vuez nevez.
Setu perag, goude beza pedet ha poaniet a-hed anzer ar Horaiz,
lavarom adarre, evel da zeiz or Badiziant
e troom kein da Zatan hag e kredom en Doue beo ha gwirion,
e Jezuz Krist hag en Iliz Santel.

Evelse eta:

- EA TREI A RIT KEIN DA ZATAN, D'AR PEHED ha da gement a zoug d'AR PEHED ?
- Ya, trei a reom kein !

- Evid EN EM DENNA EUZ GALLOUD AR PEHED, HA TREI A RIT KEIN DA GEMENT A ZOUG D'AN DROUG ?

- Ya, trei a reom kein !

- EVID HEULIA JEZUZ KRIST, HA TREI A RIT KEIN DA ZATAN, TAD AR PEHED ?

- Ya, trei a reom kein !

- HA KREDI A RIT E DOUE, AN TAD OLL-HALLOUDEG, KROUER AN NENV HAG AN DOUAR ?

- Ya, kredi a reom !

- HA KREDI A RIT E JEZUZ KRIST, E VAB UNGANET, ON AOTROU, A ZO GANET GAND AR WERHEZ VARI, E-NEUS GOUZANVET AR BASION, A ZO BET SEBELIET, A ZO ADSAVET DA VEO A-DOUEZ AR RE VARO HAG A ZO AZEZET EN TU DEHOU D'E DAD ?

- Ya, kredi a reom !

- HA KREDI A RIT ER SPERED SANTEL, EN ILIZ SANTFL KATOLIK, E KOMUNION AR ZENT, ER PARDON EUZ AR PEHEJOU, E ADSAO AR HORVOU HAG ER VUEZ PEURBADUZ ?

- Ya, kredi a reom.

Doue, oll-halloudeg, Tad Or Zalver Jezuz Krist,
c'hwi ho-peus greet deom beza ganet a-nevez dre an Dour hag ar Spered Santel,
c'hwi hag ho-peus roet ar pardon euz a gement pehed,
plijet ganeoh or mired c'hoaz, dre ho kras,
en Aotrou Krist Jezuz, or Zalver, evid ar vuez peurbaduz. AMEN !

E-keid ha m'ema ar beleg o strinka dour war ar bobl, e heller kana-teun dra bennag, diwar-benn Sakramant ar Vadiziant.

WAR AR PROVOU

Gand ar provou-mañ, Aotrou Doue, digemerit pedennou ho Pobl;
grit ma teuo deom diwar ar Zakrifis boulhet e Mister ar Pask beza pare da viken. Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

GOUDE AR KOMUNION

Plijet ganeoh sila ennom ho Spered a garantez,
evid ma vo unanet dre ho karantez ar re ho peus maget
dre Sakramant ar Pask. Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

IT E PEOH OR ZALVER, ALLELUIA ! ALLELUIA !
Bennoz da Zoue, alleluia ! alleluia !

AR ZUL FASKPEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...
 En deiz-mañ, Aotrou Doue, dre ho Mab treh d'ar maro,
 ho peus digoret deom an nor d'ar vuez peurbaduz: +
 ho pedi a reom, ni hag a ra gouel Or Zalver adsavet da veo,
 ma teuo ho Spered d'ober ahanom tud nevez
 ha ma savim da veo en-dro e sklêrded ar gwir vuez.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, or halon o tridal gand levenez ar Pask,
 e kinnigom deoh ar Zakrifis-mañ,
 e-neus ar vertuz dispar da nevezi ha da vaga buez hoh Iliz.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

PREFAS LEOR-OVERENN, pajenn 46

GOUDE AR GOMUNION

Pedom asamblez...
 Diwallit hoh Iliz, Aotrou Doue, gand ho madelez ha ne da skuiz morse:
 nevezet he buez gand sakramañchou ar Pask,
 grit dezi mond beteg splannder an adsao da veo.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

+++++

EIL SUL FASKPEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, trugarezuz a viskoaz^{ba} da viken,
 buhezekaad a rit feiz ho pobl gand goueliou ar Pask;
 lakit da greski ar hras on-eus bet diganeoh,
 ma komprenim gwelloc'h pebez badiziant he-deus or gwalhet,
 ha dre be Spered om bet ganet a-nevez,
 ha gand piou om bet prenet.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh
 ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Digemerit gand madelez, Aotrou Doue, provou ho pugale gristen,
 deuet dezo buez nevez dre ar feiz hag ar vadiziant,
 grit m'o devo ivez an eürusted peurbaduz.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

PREFAS LEOR-OVERENN, pajenn 46

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...
 Ni ho ped, Doue oll halloudeg, goude m'on-eus resevet Sakramant ar Pask,
 grit ma kendalho heb ehan e labouren on ene.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

TREDE SUL AR PASKPEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, goude beza degaset d'ho pobl, nerz ha yaouankiz nevez,
grit ma chomo da viken el levenez;
pa'z om eüruz dija gand an enor da veza bugale dech,
dalhit stard ennom an esperans da zewel eun devez a varo da veo.
Dre Or Zalver KJezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ha (leun a c'hloar) ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ober digemer vad d'ar provou
a ginnig deoh an Iliz leun a levenez;
goude beza degaset dezi kement a joa,
grit ma vleunio enni levenez da viken.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

AR PREFAS : Unan euz an Amzer Fask.

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...

Sellit gand madelez, Aotrou Doue,
ouz ar bobl ho peus renevezet dre ho sakramañchou,
ha peogwir ho peus roet deom eur horv galvet d'ar hloar,
grit deom chom unanet ganeoh, beteg an deiz. na savim a varo da veo.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

+++++

PEVARE SUL AR PASKPEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel, renit ahanom daved eürusted an Neñvou,
ra zigouezo poblad ho tud fidel, daoust d'an dinerz ma'z eo,
e leh m'eo eet he fastor leun anerz hag a hloar,
Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma talvezo Misteriou ar Pask
da vaga ennom al levenez a zeu deom diganeoh;
ra gendalhint da ober ennom labour ar zilvidigez
ha da rei deom levenez peurbaduz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN

GOUDE AR GOMUNION

Tad oll-halloudeg ha Pastor leun a vadelez,
plijet ganeoh diwall ho teñved gand karantez tener;
goude beza or zaveteet gand Gwad ho Mab,
grit ma'z aim da veva eüruz a prajou glaz ho paradoz.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

PEMPVED SUL AR PASK

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

C'hwi eo a bedom, on Doue hag or Mestr, ho peus degaset deom ar Zalver,
ha grêt ahanom ho pugale; taolit eur zell madelezuz
war ar re ho peus evito karantez eun Tad, abalamour d'ho feiz en Aotrou Krist,
grit dezo beva er frankiz gwirion ha gounid ar vuez peurbaduz.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, e Sakrifik an Overenn, e tigemerit or provou,
hag e rit deom diouz ho tu, kaoud perz en ho puez divin;
goulenn a reom diganeoh, pa'z om deuet da anaoud ho kwirionez,
ar hras da zerhel stard dezi a-dreuz or buez, penn-da-benn.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

PREFAS: unan euz re an Amzer Fask

GOUDE AR GOMUNION

Pedor a-unan...

Aotrou Doue, chomit tost da bobl ho tud fidel,
ho peus digoret dezo feunteun ho sakramañchou;
grit dezo en em zistaga diouz plegou fall an natur,
evid kaoud der zigor er vuez peurbaduz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

C'HWEHVED SUL AR PASK

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue oll-halloudeg, grit deom, da geñver ar goueliou-mañ,
kana a greiz kalon meuleudi an Aotrou Krist adsavet da veo;
ra jomo beo ha frouezuz en or buez Mlster ar Pask a reom envor anezañ.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Ra zavo or pedennou beteg ennoh, Aotrou Doue, da heul ar provou-mañ;
grit ma vim neteet ha ma tennim gwelloc'h frouez euz sakramañchou ho karantez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

PREFAS unan euz re an Amzer Fask

GOUDE AR GOMUNION

Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel, c'hwi a ra ahanom,
dre or Zalver savet a varo da veo, krouadurien nevez
evid ar vuez peurbaduz;
kreskit ennom youl vad ha nerz dre ar magadur santel on-eus resevet.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

YAOU -- BASKPEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg, kargit or haloncu, ni ho ped,
a levenez hag a anaoudegez vad,
peogwir, gand or Zalver pignet d'an Neñv,
an treh e-neus gounezet a zo dija on hini ivez;
o veza ma'z om izili euz e Gorv
ha ma'z eo eet en or raog e-kreiz ho kloar,
grit deom, dre an esperañs, beva eno a spered hag a galon.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, gand eur galon izel, e teuom da ginnig dech ar Zakrifis-mañ,
en deiz ma reom gouel ho Mab pignet d'an Neñv;
goude beza digemeret or provou,
roit deom en distro, ar grasou or zikouro da vond, ni ivez d'ar baradoz.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

PREFAS II da lavared beteg derhent ar Pantekost.

E gwirionez, just ha santel eo, ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwi, Tad Santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
dre Jezuz Krist, Or Zalver.
Rag goude beza savet a-douez ar re varo,
e-neus Jezuz en em ziskouezet beo d'e oll ziskibien,
ha dirag o daoulagad ez eo pignet d'an Neñvou,
evid on lakaad da gaoud perz en e natur a Zoue.
Setu perag, e-kreiz levenez Fask skuillet e peb leh,
ema pobl an dud vadezet o tridal, epad m'ema, e-barz an Neñvou,
an oll sperejou eüruz, o kana d'ho kloar, heb ehan ha da viken:

pe: Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared a greiz kalon:

COMMUNICANTES er bedenn-veur genta:

"Unanet gand an ILiz a-béz, e lidom an Deiz Santel mured,
m'e-neus ho Mab Unganet douget on natur-den gwan ha dister,
a-zeoud ehoen ho kloar, hag e fell deom enori....hag all

GOUDE AR GOMUNION

Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
madou an Neñv a roit deom da dañva,
p'emaom c'hoaz war an douar, plijet ganeoh
maga ar volonteiz da veva unanet gand or Zalver,
eñ hag e-neus laket on natur-den da droni en ho kichen:
Doue beo ha leun a hloar a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

SEIZVED SUL AR PASK

PEDENN AN DIGOR

Pedon Doue...
Selaouit or pedenn, Aotrou Doue,
ni hag a gred ema Jezuz Krist, Salver an dud,
o vev en ho kichen, e kreiz ho kloar,
grit deom kompren ema ivez o chom ganeom,
evel m'e-neus lavaret, beteg an deiz diweza euz ar bed,
eñ, on Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, war-eun-dro gand ar provou-mañ,
digemer pedennou ho pugale an Overenn-mañ, a lidom gand or brasa karantez,
ra gaso ahanom da hloar ar Baradoz. Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a-unan...
Ni ho ped d'or selaou, Aotrou Doue,
dre vertuz ar Misteriou Santel-mañ,
grit deom kredi startoh e teuio da wir menozioù ho karantez
evid Korv an Iliz a-bêz,
kenkoulz ha m'eo grêt dija evid an Hini a zo penn d'ar Horv-se,
Jezuz Krist, or Zalver, Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

+++++

DERHENT GOUEL AR PANTEKOST

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...
Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
falvezet eo bet ganeoh, e vefe roet da anaoud Mister ar Pask,
da genver deiz ar Pantekost;
grit ma teuy an dud, ken dizunanet etrezo,
da veza bodet dre ar Spered Santel, evid ma teuio, peb-hini en e yez,
da renta gloar deoh dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou, taoler bennoz ar Spered war or provou, ma resevo hoh Iliz,
diwar-ze ar garantez a raio anezi, e-kreiz ar béd, eur zin sklêr euz ar zilvi-
digez. Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Grit, Aotrou Doue, ma teuio ar Gomunion-mañ, da entana ahanom dre ho Spered roet
ganeoh, gand largentez d'hoh Ebestel, azaleg penn kenta an Iliz.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

pe: Selaouit or pedennou, Aotrou Doue oll-halloudeg, hag evel m'e-noa
greet da zeiz ar Pantekost, ra zeuy ar Hrist, sklerijenn ar sklerijenn,
da zigas war hoh Iliz ar Spered a dan: ra sklerijenno kalon ar re
ho peus renevezet, ha ra startaio anezo en ho kras.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

TAOLENN

<u>Amzer an Azvent</u>	B - I,3,4,6
<u>Amzer Nedeleg</u>	
Gouel Ginivelez or Zalver.....	T,I-8
Ar Famill Zantel.....	T,II
Santez Mari,Mamm Doue.....	T,I4
An eilSul goude Nedeleg.....	T,I6
Epifani Or Zalver.....	T,I9
Badiziant Or Zalver.....	T,22
Aviel ar Gouel.....	B,I0
<u>Amzer ar Horaiz</u>	
Merher al Ludu.....	T,24
Suliou ar Horaiz.....	B,II,I3,I5,I7,20.
Sul ar Bleuniou	
Aviel goude ar brosesion	B,23
Overenn ar Basion.....	T,27
Ar Basion.....	B,24
<u>Ar Yaou Gamb-Lid-an Amzer-Fask</u>	T,29
Cwener ar Groaz.....	T,32
An NOz-Fask,lennadennou.....	T,43-57
an aviel.....	B,30
Ar Zul-Fask.....	T,59-62
an diou lennadenn hag ar salm.....	B,3I
an aviel.....	T,59
IIIe,IVe,Ved,VIIed.....	B,32,34,36,37.
Ar Yaou-Bask	
an diou lennadenn.....	T,65.
an aviel.....	B,39
VIIed Sul ar Pask.....	B,40
Ar Pantekost.....	T,69-78
<u>Gouelicu goude ar Pantekost</u>	
Gouel an Dreinded.....	B,42
Gouel ar Zakramant.....	B,43
Gouel ar Galon Zakr.....	B,45
<u>Ar Zuliou war ar bloaz</u>	B,48-IO7
<u>Gouel deiziet hag a hell beza lidet da zul</u>	
Sant Paol Aorelian.....	T,I25
Gouel Maria-Veurz.....	T,I29
Sant Erwan.....	T,I33
Santez Anna.....	T,I37
Ginivelez ar Werhez.....	T,I39
Sant Kaourantin.....	T,I43

oooooooooooo
 oooooooooo

XIed SUL WAR AR ELOAZ

PEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, nerz ar re a laka o fiziañs ennoh,
selaouit or pedenn.
Peogwir eo bresk ha dinerz an dên, ha pa n'hell netra hebdoh,
roit deom dalhmad ar zikour euz ho kras.
Evel-se e hellim, en eur vired ho kourhemennou,
rén or mennadou hag or buez en doare da blijoud deoh.
Dre Jezuz Krist, on Aotrou, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a cll viskoaz da virviken.

AMEN!

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, c'hoant ho-peus ma kavfem er madou
a ginnigom deoh magadurez buez ar bed-mañ
hag ar zakramant euz eur vuez nevez;
grit m'hellio bepred or hervou hag on eneoù kaoud ennoh o mad.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Ar perz on-eus kemeret en ho Misteriou, Aotrou,
a zo eur skeudenn euz ar peñ a vo an union etre kristenien ennoh-hwi;
grit ma servicho da lakaad union en hoh Iliz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

+++++

XIIed SUL WAR AR BLOAZ

PEDENN AN DIGOR

Grit deom, Aotrou Doue, kaoud bepred doujañs ha karantez evidoh,
peogwir n'ehanit morse da heñcha, en o buez,
an dud a stagit ouzoh gand liamm stard ho karantez.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a cll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Digemerit, Aotrou Doue, ar Zakrifis a beoh hag a veuleudi;
evel-se, or halonou, nêteet dre e halloud, a hellio kinnig deoh
eur garantez da blijoud deoh.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Renevezet gand Korv Sakr ha Gwad Presiuz or Zalver,
e pedom ho madelez, Aotrou Doue,
grit, dre ar Zakramant a lidom, ma vim saveteet da viken.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN!

XIIIed SUL WAR AR BLOAZPEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, c'hoanteet ho peus, ma teufem,
 e reseo ho kras, da veza bugale a sklerijenn;
 na lezit ket ar gaoz d'or beuzi en deñvalijenn;
 med roit deom ar hras da veza bepred skeduz
 euz splannder ho kwirionez.
 Dre Jezuz Krist ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh
 ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, c'hwi hag a zo gallouduz en ho sakramañchou;
 grit m'hellim, ni ho servicherien, beza din da ginnig
 ho tonezonou sakr.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Aotrou Doue, grit ma tevio Korv ha Gwad Jezuz Krist,
 kinniget e sakrifis ha resevet er gomunion,
 da rei deom ar vuez.
 Unanet stard ganeoh dre eur garantez ha ne day ket da get,
 e tougim freuez hag a bado da viken.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

+++++

SANT YANN VADEZOUR - overenn an derhentPEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue oll-halloudeg, plijet ganeoh rei d'ho pugale
 ar hras da gerzed gand hent ar zilvidigez, aketuz da heulia
 aliou SANT YANN, digorer-hent d'or Zalver;
 evid ma'h en em gavim surroh aze gand an hini
 roet gantañ da anaoud, Jezuz Krist, ho Mab hag or Zalver,
 eñ hag a zo Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
 a oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, taolit eur zell a vadelez war ar provou
 a ginnig dech ho Pobl, da geñver Gouel SANT YANN VADEZOUR;
 grit deom seveni dre eur vuez gouestlet d'ho servicha,
 ar pezh a lidom zakramant.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Aotrou, en Doue, ra vim skoazellet
 gand pedenn hallouduz SANT YANN VADEZOUR,
 ni hag on-eus kemeret perz en Overenn.
 Ra zavo e bedenn evidom warzu an hini
 e-noa embannet e zonedigez ha roet da anaoud e oa an Oan treh d'ar pehed,
 Jezuz Krist, ho Mab, eñ hag a zo Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
 a oll-viskoaz da virviken.

AMEN !

SANT YANN VADEZOUR - Overenn an deizPEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, plijet^{eo} ganeoh digas SANT YANN VADEZOUR
da lakaad ho pobl e tro da zigemer ar Mesiaz;
roit d'ho pugale al levenez spirituel, ha renit spered an oll dud fidel
war hent ar peoh hag ar zilvidigez.
Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh
ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.

AMEN!

WAR AR PROVOU

War hoh Aoter, Aotrou Doue, e lakom on donezoncu,
evid lida ervad Ginivelez SANT YANN, e-neus profedet e teufe
Salver ar bed ha diskouezet edo dija en on touez, Jezuz Krist,
ho Mab hag on Aotrou, en hag a zo Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Aotrou Doue, roet ho-peus deom nerz nevez ouz an daol,
m'en em ro enni an Oan Santel da vagadurez,
hag ho pedi a reom evid hoh Iliz;
Lida a ra gand levenez Ginivelez YANN VADEZOUR;
dezi da houzoud eo Jezuz an hini e-neus he zavet,
en hag a zo Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

+++++

SANT PER HA SANT PAOL - Overenn an derhentPEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, ra zeuio war or zikour pedenn
an Ebestel santel PER ha Paol:
drezo eo he-deus hoh Iliz resevet an teñzoriou kenta euz ho kras:
grit ma teuio deom bremañ dre o dacuarn
ar zikour on-eus ezomm evid or zilvidigez.
Dre Jezuz Krist, or Zalver, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Leun a levenez, o lida Gouel an Ebestel Santel PER ha PAOL,
e tigasom, Aotrou Doue, ar provou d'hoh aoter;
gouzoud mad a reom n'on-eus meritet netra,
eürusoh a'ze n'om ken o veza m'eo diwar ho kras ha netra ken,
e teu deom or zilvidigez. Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Aotrou Doue, sklerijennet ho-peus ho tud fidel,
dre gelennadurez an Ebestel;
plijet ganeoh ma teuio deom nerz nevez dre ho Sakramant.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

SANT PER HA SANT PAOL - Overenn an deizPEDENN AN DIGOR

Aotrou Doue, roet ho-peus deom an deiz-mañ a levenez santel,
 evid lida Gouel an Ebestel eüruz PER ha PAOL.
 Plijet ganeoh mired hoh Iliz atao fidel penn-da-benn d' o helennadurez,
 peogwir ez int bet eviti prezegeñien genta ar feiz.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Aotrou Doue, d'arheñv ar provou a ginnigom deoh
 ra zavo daveñh pedenn hoh Ebestel;
 ra vo ganeoh ivez evid or sklerijenna hag or hernerza
 da lida ervad ar Zakramant.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Roet ho-peus nerz deom adarre, Aotrou Doue,
 dre Zakramant an Aoter;
 grit deom beva en loh Iliz evel ar gristenien genta,
 aketuz da Zakramant an Aoter, fidel da helennadurez an Ebestel,
 e vezim gwrizianet stard en ho karantez,
 beteg knoù eur galon hag eun ene hebken.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUEL SANTEZ ANNA (evel ma vez lidet e Santez Anna Wened)PEDENN AN DIGOR

Orezonou all evid S.ANNA: kaier VII, p.40
 Prefas all : LEOR AN AOTER p.50

Aotrou, Doue on Tadou, dibabet ho-peus SANTEZ ANNA,
 da lakaat er bed mamm ho Mab.
 Ho pedi a reom da genver ho Gouel:
 plijet ganeoh rei deom ar zilvidigez ho-peus prometet d'ho pobl.
 Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

LENNADENN GENTA - Ar promesaou greet gwechall d'ar Batriarked a zo deuet da
 wir e Jezuz, mab an Itron Varia.

Lennadenn euz Levr Penn Kenta ar Bed (Gen.28/2-5).
 (evel e Santez Anna - LEVR T pajenn I37)

SALM 104 - I-5, 8-II

Diskan: Meuleudi deoh, Aotrou Doue,
 da wir e teu bepred ho promesaou.

- 1/ Kanit bennoñ da Zoue, meuleudi d'e ano,
 embannit e-touez ar poblou e oberou kaer !
- 2/ Dezañ ho kanennoù, sonit en e enor,
 embannit e oll vuzudoù !
- 3/ Lakit ho kloar en e Ano Santel,
 ra vo levenez e kalonou ar re a glask Doue.

- 4/ Klaskit warlerh an Aotrou hag e nerz,
heb ehan klaskit beza dirazañ !
- 5/ Bezit soñj euz an traou souezuz e-neus greet,
euz e vuzudou hag ar pez e-neus divizet e henou.
- 8/ Dalhmad e-neus soñj euz e emgleo,
euz ar bromesa e-neus greet evid mil rummad,
- 9/ promesa greet da Abraham
ha touet da Izaag.
- IO/Ober a reas anezi eul lezenn evid Jakob,
hag evid Israel eun emgleo peurbaduz !
- II/"Douar Bro-Ganaan a roin dit,
evid da lod a herez."

EIL LENNADENN - Ar gristenien a zo bugale da Abraham dre ar feiz.

Lennadenn euz lizer Sant Paol d'ar Galated. 3/6-9 ,26-29

6. Va breudeur, Abraham a gredas e Doue
ha kement-se a oe kontet dezañ da justis.
7. Intentit mad eta: an dud a feiz,
ar re-ze a zo bugale da Abraham.
8. Hag ar Skritur, o weled en araog e teufe Doue
da rei ar justis d'ar bayaned, dre ar feiz,
a roas da anacud en araog ar helou mad-se da Abraham:
" Ennout e vo benniget an oll vroadou."
9. En doare ma vo benniget an dud a feiz
a-unan gand Abraham, an den a feiz,
26. C'hwi zo oll breudeur e Jezuz Krist,
bugale da Zoue dre ar feiz.
27. Ha c'hwi oll, pa 'z eo bet roet deoh Badiziant an Aotrou Krist,
a zo warnoh dremm an Aotrou Krist.
28. N'eus mui ano euz yuzeo ha payan, euz sklavour ha den libr,
euz gwaz ha maouez, peogwir n'heñ nemed unan,
c'hwi oll er Zalver Jezuz.
29. Ha ma 'z oh d'ar Zalver, ez oh eta gwir vugale Abraham,
heritourien d'ar madou prometet dezañ gand Doue.

ARAOG AN AVIEL

Alleluia ! Santez Anna a oe o hortoz ar frealzidigez
da zond da bobl Israel; hag ar Spered Santel a oa ganti. (Luk.22/25)

AVIEL Lukas 2/25-33 ,36-38 - gweloud LEVR T pajenn 80

WAR AR PROVOU

Ho pedi a reom, Aotrou Doue;
plijet ganeoh digemer ar pez a ginnigom deoh a galon vad,
da genver Gouel Santez Anna.
Grit deom kaoud perz er vennoz
prometet da Abraham ha d'e vugale .
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

PREFAS Pa zeuas an amzeriou d'e zermen, evid prepari eur famill (tiegez)
a dud ar bed-mañ, evid ar Zalver ho-poa prometet, ho-peus karget euz
ho kras SANTEZ ANNA, en eur rei dezi beza marm en eun doare dispar;
anezi eo bet ganet dibeh ar Werhez Vari, marm ho Mab, J.K. on Aotrou...

GOUDE AR GOMUNION

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, e vefe ganet ho Mab Unik en eur famill euz an douar,
evid ma teufe an dud, dre eun eskemm estlammuz, da veza ganet endro, euz ho puez
heñ unan. Roit d'ar re ho-peus maget gand bara ho vugale da veza santelleet
gand ar spered a ra anezo bugale deoh. Dre J.K. or Zalver.

GOUEL MEUR AR PANTEKOST

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, dre vertuz ar Mister a lidom d'ar PANTEKOST,
c'hwi a ro santelez d'hoh Iliz, e peb bro dre ar bed;
plijet ganeoh c'hoaz
skuilla donezonou ar SPERED SANTEL war an douar a-béz,
ha labourad dalmad, e kalonou ar gristenien,
kenkoulz ha m'ho peus grêt en amzer an Ebestel.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, hervez ar bromesa grêt gand ho Mab,
ma teuo ar Spered Santel, d'or sklerijenna muioh-mui
war ar Mister Santel emañ o lida,
ha da zigeri or sperejou d'ar wirionez penn-da-benn.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll --unan...

Aotrou Doue, peogwir e tigorit d'hoh Iliz teñzor ar madou euz an Neñv,
mirit enni ar hras ho peus skuillet warni en deiz-mañ:
ar SPERED SANTEL resevet hirio da labourad ennom kreñvoh-kreñva,
ha magadur ar Gomunion da dalvoud evid or zilvidigez peurbaduz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

+++++

GOUEL AN DREINDED SANTEL

PEDENN AN DIGOR

Pedom Doue...

Aotrou Doue, c'hwi ho peus kaset er bed
ho Mab karet hag ho Spered a zantelez,
evid sklerijenna an dud war mister ho puez:
grit deom eta, beb gwech, pa ziskleriom ar gwir feiz,
renta gloar d'an Dreinded Santel, hag adori eun Doue hebken oll-halloudeg.
Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU

Ho pet ar vadelez, Aotrou Doue, pa bedin bremaig hoh Ano Santel,
da skuill ho pennoz war provou an Overenn-mañ,
ha d'on lakaad dreizi e stad da veza, ni ivez,
eur brovadenn kinniget deoh evid atao (da viken).
Dre Jezuz Krist, or Zalver.




AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Aotrou Doue, grit ma vo ar Gomunion-mañ talvouduz deom evid mad ar horv
hag an ene, ha ma talhim mad d'or feiz en Dreinded Santel,
eun Doue hebken e tri ferson.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.



AMEN !

(K: Job an Irien
M: M. Scouarnec)



- 2- Jezuz, Mab an Tad, ganet en eur hraou (bis)
 Staget ouz ar hoad dre zroug ha dre haou (bis)
 C'hwi 'peus maget an oll boblou gand ho karantez
 Ha gouzanvet er bacourtez 'vid ar wirionez.
- 3- Pa vez du or penn ha rust or poaniou
 Pa vez eun elfenn a beoh 'n or homzo
 Digorit deom on daoulagad pell diouz
 peb enkreiz,
 'Vid ma hellim reseo peb tra gand
 gwir garantez.


(K: Job Seité
M: M. Scouarnec)




- 1- Di- go- rit deom ho pa- ra- doz.
2- Greunenn ner-zuz ho ka- ran- tez.
3- Ha gou-nid deom ka- lon e Dad.



1- Eur pred ho peus deom kin-ni-get, eur pred ho peus deom kin-ni-get (bis)



'Vid ma kres-ko ar peoh er bed
'Vid ma kres-ko ar peoh er bed Je- zuz o Mab Dou- e, 'vid ma kres-




ko ar peoh er bed Je- zuz. (bis)

- 2- Bara an dén 'peus kemeret - 'Vid chom ganeom bemdez, bepred.
3- Pa 'z om maget gand ho Spered- 'Vel gwir breudeur, red 'n em gared.
4- Disamma ar re hualet - Difenn ar gwir heb chom nehet.
5- Gand karantez ha lealded - C'hwi 'peus e-kreiz an dud bevet.
6- War ho roudou ez om galvet - Heb ho kalloud ez om kollet.
7- Peb tra on-eus ni resevet - Etre breudeur ra vo rannet.
8- Pred ar joa on-eus tanvet - En or buhez ra vo gwelet.


(Ar hantik-man zo da veza kanet er mod Kan-diskan).

=96 AN HEOL O SEVEL (K: Job Seité; M: M. Scouarnec) Tempo: marche écossaise.


Do la^m Mi^m la^m Fa Sol avec bombarde et batterie.




- 1- Sell ouz an heol o se-vel Al- le- lu- ia.
2- Ra dre-ger-no an dou-ar Al- le- lu- ia.
3- Pe- gwir eo goul-lo ar bez Al- le- lu- ia.




- 1- Kaë-roh e sked an dremm-wel Al- le- lu- ia.
2- Di-rag e hal-loud dis-par Al- le- lu- ia.
3- Ema ganeom a nevez Al- le- lu- ia.



Sol Fa Do La^m7 Sol⁷



- 1- Ar béd hi-rio 'zo war hed Al- le- lu- ia.
2- Kaer-der ha lufr ar ste-red Al- le- lu- ia.
3- Ka-nom oll ol le-ve-nez Al- le- lu- ia.



- 1- Gand mall meu-li mestr ar bed Al- le- lu- ia.
2- N'int netra e-kerz e sked... 3- D'or Zalver deut e buhez...

